

# PA GOUEZAS

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg, René Abjean

*An oll*

1. Pa goue - zas ar skour - jez war e skoaz Ha pa skoas ar zou - dard di - dru - ez,  
3. Pa bi - gnas d'ar c'hal - var gand e groaz, Pa za - vas e za - ouarn war ar c'hoad,

*An oll*

1. Ar béd a - béz a c'hou - zañ - vas Gand Ma - big paour ar Ga - ran - tez.  
3. Ar gwez zo - ken a c'hou - zañ - vas Gand Ma - big paour ar Ga - ran - tez.

*Unan*

2. Pa we - las drein ha spern war e benn, Cha - den - net ha sta - get 'vel eul laer,  
4. Pa var - vas mab an dén war ar groaz, Kail - la - ret, gla - ha - ret, han - ter - noaz,

*Unan*

2. An drez zo - ken a c'hou - zañ - vas Gand Ma - big paour ar Ga - ran - tez.  
4. N'eus dén e - béd na c'hou - zañ - vas Gand Ma - big paour ar Ga - ran - tez.

*An oll*

5. Pa zou - gas korv ma - ro he Mab braz, Ar Wer - hez a zou - gas Ka - ran - tez;

*An oll* *Rit...* *Fin*

5. N'eus mamm e - béd na c'hou - zañ - vas Gand Mam - mig paour ar Ga - ran - tez.

1. Pa gouezas ar skourjez war e skoaz  
Ha pa skoas ar zoudard didruez,  
Ar béd a-béz a c'houzañvas  
Gand Mabig paour ar Garantez.
2. Pa welas drein ha spern war e benn,  
Chadennet ha staget 'vel eul laer,  
An drez zoken a c'houzañvas  
Gand Mabig paour ar Garantez.
3. Pa bignas d'ar c'halvar gand e groaz,  
Pa zavas e zaouarn war ar c'hoad,  
Ar gwez zoken a c'houzañvas  
Gand Mabig paour ar Garantez.
4. Pa varvas mab an dén war ar groaz,  
Kaillaret, glaharet, hanter-noaz,  
N'eus dén e-béd na c'houzañvas  
Gand Mabig paour ar Garantez.
5. Pa zougas korv maro he Mab braz,  
Ar Werhez a zougas Karantez ;  
N'eus mamm e-béd na c'houzañvas  
Gand mammig paour ar Garantez.

## QUAND TOMBA...

1. Quand tomba le fouet sur son épaule,  
Et quand le soldat frappa sans pitié,  
Le monde entier souffrit  
Avec le pauvre Fils de l'Amour.
2. Quand elles virent piquants et épines sur sa tête,  
Enchaîné et attaché comme un voleur,  
Les ronces elles-mêmes souffrirent  
Avec le pauvre Fils de l'Amour.
3. Quand Il monta au calvaire avec sa croix,  
Quand Il leva les mains sur le bois,  
Les arbres eux-mêmes souffrirent  
Avec le pauvre Fils de l'Amour.
4. Quand mourut le Fils de l'homme sur la croix,  
Sali, affligé, à demi-nu,  
Il n'y eut personne qui ne souffrit  
Avec le pauvre Fils de l'Amour.
5. Quand elle porta le corps mort de son grand Fils,  
La Vierge porta l'Amour;  
Il n'y eut aucune mère qui souffrit  
Avec la pauvre Mère de l'Amour.